



SKRID 26

taolenn

Per DENEZ

Barzhoneg diezhomm P. 5

Daniel MOIGN

Montparnasse by night P.6

M. BEYER

Gloar... P.7

E.A. POE

Ar varrikennad amontillado P.11

F.R. MEAVENN

Marv er gêr P.21

Sofi BERNARD

Digenvez P.31

Pantcho MIHAILOV

Ar jenoflenn ruz P.34

Ifig SKIRIOU

Viviana P.40

LABOLEN

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN
KENTAN TRIMIZIAD 1981
TI-MOULAN PREVEZ
MEROUR: PER DENEZ
RENER: GWENDAL DENEZ

KOUMANANT: 30 LUR EVIT 4 NIVERENN
PER DENEZ , RI, PLOARE
29 100 DOUARNENEZ
CCP: DENIS 1499-51 ROAZHON
KAS AR SKRIDOU D'AR MEMES CHOMLEC'H

BARZHONEG DIEZHOMM

Skrivañ a ran e brezhoneg...
" Peseurt brezhoneg ?
Hini Rosko, Lotei pe Bleraneg ? "
Skrivañ a ran...
" Peseurt skritur ? "
Skrivañ...
" Perak skrivañ ?
Emberr e vo
Fest-Noz... "

Per DENEZ

Daniel MOIGN

MONTARNASSE BY NIGHT

Bremañ ez a an eouliou
Gant maged hor sigaretenu
Bremañ p'emañ prenet da viken
Dorioù ar priveziou
Distro ebet
Hag adarre mojenn ar barzh
Kollet e alc'houez gantañ
A ! Sant Malo, fidamdoustik,
Pelec'h 'm eus lakaet ma eorioù ?
Ik vaar graag naast deze kade
Naar de hart staat
Et un pti dmi ?
Da bep moualc'h dineizhet
Ar c'horn rouantelezh-mañ
Yec'hed mat !

M. BEYER

GLOAR DA IJINOUR AR SUNEREZ, RA VO MEULET, MOULET
HA MALET !

Mintin abred e savas Yann Pouloudeg. Lonket gantañ e vanne te indian, e walc'has e zent (" Buanoc'h-buan gant ar broust-tredan ha fresk o alan gant Propikodan "). Dibab a reas en armel gofek bragoù voulouz glas hag ur chupenn c'hell. Voulouzet penn-kil-ha-troad e klaskas lamm mat en e votoù ler-Marok, met an div c'hoaperezh o doa cheñchet plas dre guzh e-keit ma oa kousket ar paotr. Neuze Yann en doa lakaet e droad dehou barzh ar votez gleiz ha viseversa. Ar c'hoarzh gant ar sapre botoù-se, gast an diaoul ! Met Yann a blije dezhañ farsadennoù hag e tarzhas da c'hoarzhin gante. Imoret mat e oa ar paotr rak diskoachet en doa barzh ur gelaouenn ur gemennadenn-vihan dedennus-tre evitañ. Dav eo lavar en doa laeret an tamm paper-se e chakod ur marmouz divalav pezhell, ur gwir spontailh ! O c'hortoz ar c'harr-boutin war blasenn ar Prefeti e oant, hag ar penn-leue vil-se o louchañ gant kement a avi ouzh ur plac'h koant hag e c'hlaourenne puilh war e adgroñch blevek. Tapout ar gelaouenn en doa graet Yann kerkent, hag en doa piñset zoken feskennoù blot an doñjer kozh. Nemet hemañ a oa debret gant al laou hag en em skrabiset en doa graet hep ober vap.

Er gemennadenn-vihan eta e veze goulennet tud ampart da dreifi dornskridoù ur barzh prusian eus ar seitekvet kantved. Brudet e-giz ma oa er bed a-bezh Eberhardt Ttrickbaum (en em lazhet dre ret evit abegoù politikel ha relijiel), e kasfe seurt afer un tamm mat a skoedoù d'an hini a lammfe warnañ, hag ar bruderezh ouzhpenn. Evit ur wech ma kouezhfe

war chouk Yann ul labour ken frouezhus, ne oa ket da dortal ! Studioù uhel en doa graet e Skol-Veur Roazhon ha desket bravig e oa deut er fin war toullad mat a yezhoù estren : ar galleg, ar c'horeaneg, ar gresianeg, ar finneg, an arabeg, ar c'hrenjapaneg, ha trefodachoù ouzhpenn. Ne ouie tra d'an alemaneg met gant sikour geriadur bras Raimon O'Parse ne zlefe ket bezañ re start. Forzh penaos n'en doa morse an Eberhardt kozh skrivet en alemaneg met en tunodo, dre ma oa e vagerez muiañ-karet ginidik eus ar Roc'h. Ha surtoud, e oa Yann o soñjal, e vefe moien dezhañ pediñ Soaz da zañsal er " Paradise " ... ha marteze Fin war ar memes tro ?

Kollet Yann en e huñvreoù e lammike war ribl ar straed. Ijinet en doa a-nevez un doare kerzhout disheñvel peogwir e kave enoüs lakaat un troad dirak egile, ha kement-se betek fin é vuhez. Setu bremañ e rae daou gammed en-araok hag unan en-adreñv. Bremañ ma oa boazet ez ae buanig awalc'h. Met ar mintin-se, ken eürus e oa, e rae fringadennoù a bep seurt, ken dirollet hag ur gavr en nevez-amzer. Ret e voe dezhañ memes teurel e bouez war ur bank da ziskoulm e gar kleiz tortiset en-dro d'e ibil-troad dehou. Chalet un tammig e oa rak n'en doa biskoazh gallet dizober an eeunañ skoulm. Dont a reas a-benn memestra.

Dindan an heol klouar e oa ur bern tud o pourmen disoursi. Ouzhpenn ar valeerien e oa poli-serien fas koad ha chupenn du o puilhañ a bep tu er straedoù e-giz kement a gelien-kaoc'h war ur bern teil. Kae-sur e oa bet galvet da vanifestiñ gant ur strollad politikel bennak. Da gerzhout e-giz ur bourc'hiz en em lakeas Yann en-dro.

O klask warlerc'h an ti-moulerezh en em gollas meur a wech er straedigoù strizh. Dek eur e oa dija ha tapet gantañ ur mell sec'hed. Azezañ a reas en

un ostaliri hag e c'houlennas ur banne Chimay gant sivi ha fourmaj rouz. Ur wech paet ha lonket e vanne, e taolas an asiedad sivi war bronnoù ledan un itron beuzet e " La Croix ". Ur mousc'hoarzh flour ha santel a redas war he muzelloù frailhennet gant ar pedennoù met Yann, sanket an tamm boued Olida en e chakod, a yeas kuit goustadik.

War dro un eur hanter ez eas da vountañ ouzh kein un den a stanke an hent. En em zigarezin seven a reas. Egile a chome aze e-giz ur peul hep rannañ ger na fiñval. Goulenn a reas Yann digantañ perak eta e chome-eñ e-unan-penn e-kreiz an hent. Ur c'hoarzhadenn-stomok euzhus o strinkañ gant an istrogell. Ur seurt fiñvadenn a reas mistrig da ziskouez da Yann an heuliad a dud o c'hortoz a-hed ar ribl. Renket mat dre dri pe bevar hervez ma oant tev pe danav, se 'rae war dro un hanter-kant metrad a vragoù hag a chupennoù voulouz. Pep hini gant un tamm paper journal en e zaouarn.

An hini all a selle ouzh Yann gant ur mousc'hoarzh aketus.

- " Ha ma rafemp un dra bennak, kamarad ? "

- " Ya, sur, dav 'vije ! "

Neuze e tisplegas da Yann :

- " Va anv 'zo Leonard Jefferson. Ne zisklipan ger tunodeg ebet ha ne ran foutre kaer eus ar varzhoniezh, met tuchantik e vo cheu gant ar re-se ! Gouest int da lousaat ar straed gant o gwad brein ha strinkadennoù bouedenn-penn. Ec'h ha beuârkk !!! 'Blij ket din nag ar sach-blev nag al loustoni... Petra soñj deoc'h ?

- " Re wir, eme Yann, kement a gac'hadoù chas a zo dija ! "

- " Mat eo, dear boy ! "

Ha setu Leonard o vouskanañ war un ton kozh :

" Piv a zigor hag a zarr ?

' trap ar c'hazh lost ar yar !

Me a zarr, te a zigor,

'n hini neus aon 'chom er goudor ! "

Ha kerkent e voe steuziet mik ar paourkezh loened
voulouzet. Ne chome deusoute nemet bernouigoù poul-
trenn gwenn war al leur. Propik e oa bremañ.

- " Boñ, eme Yann, plas 'zo evidomp-ni ; deomp
d'en em ginnig hag e c'hellimp kenlabourat ! "
- " Oaaaouuh ", eme Leonard o tic'henaouiñ.
- " Bo ", eme Yann o tigor bras e veg d'e dro...

A-greiz-toud e lakeas e zorn war an tamm paper
journal chomet e foñs e chakod. Gant lizheroù bras
e oa merket : " LABOUR PAEET EN A-RAOK "

- " Boulc'hurun ! " a huchas Yann.
- " By Jove ! " a respontas Leonard.

Just e oa ar burevioù o paouez bezañ digoret.
Antreal a rejont, o curriculum vitae gante.

A-benn ur c'hard eur e oant o tont maez, sammet
dindan daou bezh mell sac'had a baperachoù louedet.
Buan-buan ez ejont da ziskargañ oberennoù klok ar
prusian barzh piñsin an Iliz-Veur. Goude-se ez
ejont sioulik da bellgomziñ da Fin ha Soaz.

Roazhon, e miz Kerzu 1980

oooooooooooooooooooo

Edgar A. POE

AR VARRIKENNAD AMONTILLADO

Keit ha n'en doa graet din netra nemet droug,
n'em boa ket kavet re ziaes gouzañv Fortunato ; pa
oa bet kroget avat da gunujenniñ ac'hanon e-kreiz ma
beg, neuze em boa touet e talvezfen dezhañ e c'hoape-
rezh. Evel just ne soñjo ket deoc'h, deoc'h-c'hwi
hag a anavez ac'hanon ken mat, e oan staget da c'hour-
drouz anezhañ en-digor. A-benn an diwezh an hini eo
em befe ma digoll : graet e oa ma soñj ganin. Ouzhpenn
kastizañ avat, e oa ret din kastizañ hep riskl ebet
evidon. Ne vezer ket digollet pa vez dav paeañ evit
an digoll. Ne vezer ket digollet kennebaut pa ne oar
ket egile piv a zo o skeiñ an taol gantañ.

Ret eo deoc'h kompren mat neuze n'am boa morse
roet da Fortunato, pe dre gomz, pe dre ober, an dis-
terañ digarez da vagon disfiziañs ouzhin. Evel a-raok
em boa kendalc'het d'ober mousc'hoarchoù seven dezhañ,
ha n'en doa ket komprenet ar paotr e oa ar soñj e oan
o vont d'e lazhañ a reas din, diwar neuze, mousc'hoar-
zhin outañ.

Un tu gwan en doa, ar Fortunato-se, ha dezhañ bezañ,
a-hend-all, ur paotr da vezañ doujet, ha zoken diwallet
dioutañ. Fougeal a rae n'en doa ket e bar evit anave-
zout ar gwin kozh. Dibaoz a wech e kaver Italianed hag
a vez plijet e gwirionez gant traoù an arz pe al li-
pouserezh. Peurliesañ e wiskont doareoù arzourion evit
touellañ gwelloc'h mondianed Bro-Saoz ha Bro-Aostria...

a-benn gounit un tamm arc'hant. Evit pezh a sell ouzh al livouriezh hag ar bravigerezh, ne oa Fortunato ken un ardaouer anezhañ, evel an darn vrasañ eus e genvroiz - met evit ar gwin, n'eo ket ober van an hini a rae, gwir garantez en doa ouzh ar gwin. Hag er c'heñver-se oan heñvel-mik outañ : barrek e oan war an holl seurtoù gwin italian a zo ha bewech ma kaven ma zro e prenen eus ar re wellañ.

Da serr-norz e tichañsas din en em gavout gant ma mignon, war fin unan eus an devezhipù-Ened ar follañ. Eñ an hini eo a zeuas d'am c'haout, o tis-kouez mignoniezh forzh pegement, rak kalz en doa evet. E giz furlukin ar Roue e oa dic'hizet : dilhad strizh daou liv a oa warnañ, hag un tog uhel, gant kleier bihan stag outañ, a oa war e benn. Ken laouen e oan ouzh e welout ma soñjas din na echufen morse da stardañ dezhañ e zorn.

Ha me lavarout :

" Fortunato, ma mignon ker, nag ur chañs en em gavout ganeoc'h ! Liv ar yec'hed a zo warnoc'h ! Setu avat, ur varrikennad Amontillado am eus prenet, pe da nebeutañ ur varrikennad gwin a zo bet gwerzhet din evel Amontillado, ha disfi am eus.

- Penaos ? emezañ. Amontillado ? Ur varrikennad Amontillado ? N'hell ket bezañ ! E-kreiz an Ened ouzhpenn-se !

- Disfi am eus, ha sot a-walc'h on bet evit paeañ hep goulenn hoc'h ali. Ne oan ket evit kavout ac'hanoc'h, hag aon am boa da goll un afer vat.

- Amontillado !

- Disfi am eus.

- Amontillado !

- Me 'garfe gouzout evit mat hag-efi eo Amontillado pe get.

- Amontillado !

- Peogwir hoc'h eus traoù d'ober fenozh emeon o vont da welout Luchesi. Ma'z eus unan hag a zo barrek, Luchesi an hini eo. Eñ a ouio lavarout din...

- Luchesi ! Hennezh ne vefe ket gouest d'ober an diforc'h etre Amontillado ha Sherry.

- Ha koulskoude e vo kavet pennoù sot evit lavarout eo barrekoc'h egetoc'h.

- Ale, deomp !

- Da belec'h ?

- Da welout ar gwin en ho kav !

- N'aimp ket, ma mignon ! Re vras eo ho madelezh. Trugarez evit ho kinnig, met ne fell ket din ho taleañ. 'Maoc'h o vont da welout tud, anat eo. Luchesi a c'hellin mont da gaout...

- Ne oan o vont da welout den ebet. Deomp !

- Nann ma mignon, n'aimp ket ! Marteze ne oac'h ket o vont da welout tud, ne vern. Met gant ar baz emaoc'h, ha yen-spontus eo ma c'hav.

- Deomp, pa lavaran deoc'h. N'eo netra ar baz-se. Amontillado ! N'eo ket gwir ! Touellet oc'h bet ! Ha Luchesi, met hennezh ne ouife ket ober an diforc'h etre Amontillado ha Sherry !

Lakaat a reas Fortunato e vrec'h dindan ma c'hazél ha me, kuzhet ma dremm gant ur maskl seiz du, paket aketus ma c'horf em mantell, a lezas anezhañ da gas ac'hanon war-du ma falazzo.

Ne oa mevel ebet er gêr : holl e oant aet da gemer un tamm diduamant. Lavaret em boa dezho na vefen ket distro a-raok ar mintin war-lerc'h, ha start em boa gourc'hemennet dezho chom da ziwall an ti - pezh a oa trawalc'h, gouzout a ouien, evit ober dezho skarzhañ kuit kerkent ha troet ganin ma c'hein.

Div c'houlouenn a gemeris, reiñ a ris unan da Fortunato, ha neuze setu me ambroug ma mignon betek dirioù ma c'hav. Evezhiek e voe diskennet gant ar pazinier, ha ni degouezhout en diwezh e kavioù-beziañ tiegezh Montrezor.

Na oa ket start ma mignon war e dreid, ha bewech ma vralle e titirine ar c'hleier bihan stag ouzh e dog.

" Ar varrikenn ? a c'houlennas.

- Pelloc'h emañ, emeve. Hogen sellit na pebezh gwiadoù gwenn a zo war ar mogerioù."

Treiñ a reas da s ellout ouzhin gant daoulagad aet dilufr diwar nerzh ar boeson.

" Salpetra ? a c'houlennas en diwezh.

- Salpetra, a respontis. Pell 'zo 'mañ ar baz ganeoc'h e-giz-se ?

- Toc'ha toc'ha ! Toc'hatoc'ha ! Toc'hatoc'ha..."

E-pad n'ouzon pet munutenn ne voe ket ma mignon evit respont.

" N'eo netra, emezañ a-benn ar fin.

- Mar plij, emeve, rust ma mouezh, deomp kuit ac'han. Prizius eo ho yec'hed. Pinvidik ez oc'h, doujet, meulet, karet. Evurus oc'h, evurus evel on bet gwechall.

Evidon, ne ra netra. Klafiv e teufec'h da vezañ, ha ne fell ket din kaout ho kleñved war ma c'houstiañs. Ouzhpenn-se, be' c'hello Luchesi...

- Trawalc'h evel-se, emezañ. Ar baz-se n'eo netra. Netra ebet. Ne lazho ket ac'hanon. Ne varvin ket gant ar baz.

- Gwir eo, gwir eo, a respontis, ha ne felle ket din trubuilhañ ac'hanoc'h evit netra. Lavarout deoc'h hepken e tlefec'h teurel evezh. Dal't. Ur banne Médoc a viro ouzhoc'h da bakañ riv."

Ha me terrif he gouzoug d'ur voutailh am boa tennet eus ur c'horn.

" Evit", emeve, o kinnig ar voutailhad dezhañ.

Sevel a reas ar voutailh d'e c'henou en ur ober ouzhin ur sell a-gorn. A-raok evañ e reas un hej d'e benn, ken e stirlinkas ar c'hleier, hag e lavaras :

" Evañ a ran da efivor an holl re varv a zo o repos en-dro dimp.

- Ha me a ev d'ho puhez hir !"

Adarre e kazelias ac'hanon ha ni hon-daou, brec'h-ouzh-brec'h, da vont war-raok.

" Bras-eston eo ar c'havioù-mañ.

- Ur familh vras e oa ar Vontrezored.

- Disofjet em eus penaos e oa ho skoed.

- Troad un den, ur mell troad, liv an acour, o flastrañ un naer a zo sanket he dent ganti e seul an den.

- Hag ar gerioù-ardamez ?

- Nemo me impune lacessit.

- Eus ar c'hentañ !" emezañ.

Lugerniñ a rae e zaoulagad, titirinañ a rae ar c'hleier. Tommañ 'rae d'am fenn gant ar Médoc. Tremenet e oamp e-biou da vogeriadoù eskern, da renkennadoù barrikennoù ha boutailhoù. Adarre e chomis a-sav hag ar wech-se e kredis pegañ e brec'h Fortunato.

" Ar salpetra ! emeve. Sellit na pegen tev eo. Evel kifivi emañ o kreskin war ar mogerioù. Amañ emaoamp dindan ar stêr. Diverañ a ra an eskern gant ar glebor. Deomp kuit a-raok na vo re ziwezhat... Ho paz...

- N'eo netra, emezañ. Deomp war-raok. Da gentañ 'vat, roit din ur banne Médoc all.

Kemer a ris ur voutailhad De Grave, ha terriñ he gouzoug outi. En un tenn anal e voe lonket gentañ. Iskis e lintre e zaoulagad. Kuit e taolas ar voutailh gant ur jestr na gomprenis ket.

Souezhet e sellis outañ. Ur wech all e reas ur fifiv d'e zorn en hevelep doare iskis.

" Ne gomprenit ket ? emezañ.

- Ne ran ket, a respontis.

- Neuze n'oc'h ket eus ar vreuriezh ?

- Penaos ?

- N'oc'h ket frañmason ?

- Eo, eo, emeve. Hag ez on, hag ez on.

- C'hwi ? N'hellit ket bezañ ! Frañmason ?

- Frañmason, ya, a respontis.

- Roit din ar brouenn !

- Setu, emeve, o tennañ ul loa-vañsoner eus dindan ma mantell.

- O farsal emaac'h, emezañ, en ur gilañ war-bouez un nebeut kammedoù... Hogen, deomp d'ober un tafiva d'an Amontillado...

- Deomp, emeve, o lakaat al loa en-dro dindan ma mantell.

Lakaat a ris ma dorn adarre dindan e gazel, ponner e poueze war ma brec'h, ha mont gentañ war-du ar varrikennad Amontillado. Treuzet e voe ganeomp ur steudad kavioù izel, diskennet gant un diri, treuzet salioù all c'hoazh, ha diskennet a-benn an diwezh en ur c'hav all, ken don ha ken gleb ma voe d'arbet d'hol lutigoù mervel.

E penn pellañ ar c'hav e oa ur c'hav all c'hoazh, bihanoc'h c'hoazh, a oa peurc'holoet e vogerioù gant eskern tud. Diouzh un tu avat e oa bet taolet an eskern en traoñ ha savet ganto, un tammig pelloc'h, ur bern uhel a-walc'h. E-kreiz ar voger lakaet noazh evel-se, e oa ur seurt logellig dezhi pevar droatad donder ha c'hwec'h pe seizh troatad uhelder. Ne seblante al logellig-se servijout da netra, bez' e oa diouti peogwir e tegouezhe da zaou mell piler greunvaen dont da gejañ eno dirak ar voger.

Sevel a reas Fortunato e lutig evit gwelout sklaeroc'h e-barzh al logell. Ne wele netra 'vat. ken gwan e oa ar goulou ma ne oa ket tu da welout moger ar foñs zoken.

" It e-barzh, emeve. Amañ 'mañ an Amontillado. Evit pezh a sell ouzh Luchesi...

- Ur penn azen n'eo ken ! a droc'has ma mignon, o vont a-raok, distabil e vale. Dem war e lerc'h e oan. A-daol-trumm e skoas ouzh ar voger-draoñ/hag, e fri peg ouzh ar garregenn, e chomas sabatoet-mik.

Amzer ur serr-lagad e voe staget. Div strapenn a oa siellet er voger, an eil a-live gant eben, daou droad etrezo. Ouzh unan e oa ur chadenn, ouzh eben ur grabotinell. Un eiladenn a voe trawalc'h din da chadennañ ma mignon ha da glozañ ar c'hadranaz. An al-c'hwez a oa ganin em dorn pa yis e-maez al logellig.

" Lakait ho torn war ar voger, emeve, hag e santot pegen gleb eo gant ar salpetra. Ur spont eo ar glebor amañ. Ur wech c'hoazh ez aspedan ac'hanoc'h da zont kuit. Hoc'h aspediñ an hini a ran. 'Fell ket deoc'h ? Neuze e vo ret din ho lezel hoc'h-unan. Met a-raok e rentin deoc'h ur servijig bennak.

- Ar varrikennad Amontillado ? eme ma mignon, diaes dezhañ gounit war e souezh.

- Ya, emeve, ar varrikennad Amontillado. "

O lavarout kement-se en em lakais da ziguzhañ mein-benerezh ha pri-raz eus dindan ar bern eskern a oa e-kichen, ha neuze, al loa-vañson em dorn, en em lakais da vogeriañ toull al logell.

N'em boa ket echuet mat lakaat ar renkennad kentañ ma komprenis e oa Fortunato divezvet da vat. Ur c'hammadenn izel o sevel klemmus eus don ar c'hav a reas din kompren an dra-se. Ne oa ket honnezh garmadenn un den mezv. Goude-se ne voe trouz ebet e-pad ur pennad mat a amzer. Lakaat a ris en o flas an eil renkennad, an drede, ar bevare. Ha neuze, a-daol-trumm, setu ar chadenn o skeiñ, evel pa vije bet hejet-dihejet gant un den aet foll-mik. E-doug meur a vunutenn e padas an trouz, ha me mont em azez war ar bern eskern evit bezañ muioc'h em aes o selaou anezhañ. Pa voe tavet gant ar storlok, ez is em sav en-dro, pegiñ el loa, ha mañsonañ ar pempvet, ar c'hwec'hvet hag ar seizhvet renkennad. A-rez gant ma bruched e oa ar

voger neuze. Adarre e ris ur paouez hag, o sevel al lutigoù e taolis sklerijenn war ar stumm chadennet el logell.

Gant un aridennad youc'hadennoù skiltr o tarzhañ trumm e voen bountet en a-dreñv. Ur pennadig e chomis en entremar... o krenañ. Hag, o tennañ ma c'hleze, en em lakais da skeiñ taolioù e-barzh an toull. Buan avat e sioulaas din. Ur flouradenn a ris, gant ma dorn, da vogerioù fetis ar c'hav, ha setu me dinec'het. Tostaat a ris adarre. Ha respont d'e youc'hadennoù gant youc'hadennoù kreñvoc'h c'hoazh. Taeroc'h egetañ, skiltroc'h ma mouezh eget e hini e youc'hen. Ken e tavas a-benn an diwezhañ.

Hantemoz e oa neuze, peuzachu al labour. Mañsonet em boa an eizhvet, an navet, an deket hag an darn vrasañ eus an unnekvet ha diwezhañ renkennad. Ur maen hepken a chome ganin da lakaat en e blas. Ponner e oa. A boan vras e teuis a-benn da sevel anezhañ ha da vountañ ur penn anezhañ etre ar volz hag ar voger. D'an ampoent-se avat e savas diouzh al logell ur c'hoarzh izel a reas d'am blev sevel a-bik war ma fenn. Ha goude-se, ur vouezh trist, ken iskis ma voe diaes din anavezout mouezh Fortunato.

" C'ha, c'ha, c'ha ! a lavare. Hi, hi, hi !... Nag ur farsadenn vras !... Nag ur farsadenn !... Peadra da c'hoarzhin hor bo pa vimp distro d'ar palazzo... he, he, he !... pa vo ganeomp ur banne bras da evañ... c'ha, c'ha, c'ha !

- An Amontillado, emeve.

- C'ha, c'ha, c'ha !... ya, an Amontillado... Hogen diwezhat e teu da vezañ... Ha n'emaint ket holl ouzh hon gortoz, er palazzo, an Itron Fortunato hag ar re all ? Deomp d'o c'haout...

- Ya, deomp, emeve.

- Dre garantez ouzh Doue, Montrezor !

- Ya, emeve, dre garantez ouzh Doue !

En aner e c'hortozis ur respont. Mont a ris e fulor. Gervel.

" Fortunato ! "

Respont ebet. Ha me gervel adarre :

" Fortunato ! "

Respont ebet c'hoazh. Ur goulou-lutig a voe taolet ganin e-barzh an toull. Ne voe ken e-giz respont nemet un ditirinadeg kleier. Darbet e voe din simplañ... ken yen e oa eno. Buan ez echuis al labour. Stankañ a ris an toull a chome c'hoazh gant ar maen a chome c'hoazh, ha mañsonañ aketus. An eskern kozh a voe lakaet endro ganin dirak ar voger nevez-savet. E-pad un hanterkantved int bet eno. In pace requiescat !

(Troet diwar ar saozneg gant Per DENEZ. Moullet evit ar wech kentañ war AN AVEL e 1946 ; adstummet evit an embannadur-mañ)

M A R V E R G Ê R

Pezh-c'hoari gant Fant R. MEAVENN

TUD AR C'HOARI

LIZ - CHANN - ANTON

(E meur e ti un den-a-vor e Bro-Leon. Marv eo eizh deiz 'zo. Emañ an intañvez, Liz, oc'h evañ kafe gant c'hoar an hini marv, Chann, a zo plac'h yaouank kozh, ha kemenez eus he micher. Emaint er eal vras en traoñ, e-touez an arrebeuri eus ar vro hag an holl draoù a vro estren bet degaset gwechall gant an hini marv. A bep seurt ez eus, armoù dreist-holl, ha pennoù koad du renket ingal war ar mogerioù. An noz a zo deuet, koan a zo bet debret. Pell 'zo dija he deus lavaret Chann e rankfe mont d'he gwele, er gambr war lein.)

CHANN.- Nann, Liz, amzer 'zo. N'ouzon ket ha ma'z oc'h graet evel don, c'hwi ivez. N'on bet morse evit komz eus traoù sirius, goude koan. Chom a reont war va c'halon ha ne c'heller ket kousket goude se. N'oc'h ket skuizh, c'hwi ? C'hoant am eus da vont da gousket, evit gwir... ya, vat, ur banne kafe ho piñe c'hoazh ? Ne rankfen ket sur... Ma vijen en ho lec'h, e stlapfen an holl bennoù du-se e-barzh an tan. Dañjerus int. Dañjerus int, m'hel lavar deoc'h. Lavaret e vije o deus un dra bennak da lavaret.

LIZ.- N'int ket bev, Chann. Kemerit un tamm sukr. Petra o dije da lavaret ?

CHANN.- Evel m'o dije gwelet un dra bennak en ti-mañ.

LIZ.- Meur a dra o deus gwelet... Ho preur a naetae anezho bep gwener. Ha marv eo d'ur gwener ivez.

CHANN.- Ganet d'ur gwener, marv d'ur gwener. Pep hini a gav din, en deus un devezh dezhañ e-unan e-giz-se... hag ez eus devezhoù a gasaan me, al lun, ar merc'her, n'ouzon perak. N'eus ket un devezh hag a zo deoc'h... Nann ? Souezhus e kavan ac'hanoc'h, Liz. Mestrez-skol oc'h chomet atav. Lavaret e vije emaoch e-touez tud hanter ziot hag hanter zrouk, evel bugale, ha neuze n'hoc'h eus fiziañs nemet ennoc'h... Sellit, sot on bet da gemer kafe ur wech all. Santout a ran va c'halon o piltrotat...

LIZ.- Skuizh ez oc'h, Chann. Labourit a rit un hanter re.

CHANN.- O, ne ran ket mui. Dres evel va breur e teuñ da vezañ moarvat. Dec'h e selaouen ouzh va c'halon e-pad an noz. Mont a rae evel un trefñ-patatez diviet. Ne gleven nemeti en defvalijenn, hag ar razhed...

Gwechall, Liz, en ti-mañ e oant dañserien dispar, ar razhed. Bremañ int labourerien. Ret e vije deoc'h kaout ur c'hazh pe kemer arsenik. N'hoc'h eus ket soñjet prenañ arsenik morse ?

LIZ.- Nann, sur, perak ?

CHANN.- Met evit ar razhed-se evel just.

LIZ.- Me 'm eus aon rak an holl loened.

CHANN.- E-giz ur gwir vestrez-skol, a lavaran deoc'h, e-giz ur plac'h savet e kêr... Atav ez eus bet razhed amañ. Karout a raen selaou outo, e-pad an noz. Soñjet em eus em bugaleaj, a zo bet ken hir, ken hir.

LIZ.- Ar bugaleaj a vez bepred re hir.

CHANN.- Marteze a-walc'h. Hag en ti-mañ e kreden klevet a-greiz-holl, hep soñjal, mouezh va mamm, mouezh va breur. Soñj hoc'h eus eus mouezh va mamm pa oa mezvez ?

LIZ.- Met, Chann...

CHANN.- Gouzout a ran. Ne oa ket ho mamm deoc'h. Ur vamm-gaer a c'hell ober n'eus forzh petra, ne c'hor-tozit nemet displijadur diouti. Marv eo avat, dre c'hras Doue. Marv eo va breur ivez... Ret eo da bep hini mervel, a drugarez Doue. Ha ne vije ket lavaret pa weler an holl ardoù a ra an dud war-lerc'h o zud marv. Daoust hag ez omp bet graet da badout ? Ma, petra 'fell deoc'h, ken iskis eo spered an den, ker pell diouzh ar wirionez, n'eus nemet gwelet ar gevier a zo er c'hrenn-lavarioù, ar re anezho n'int ket diot penn-da-benn, evel :

Keuz a-raok pa n'eus ket,
Keuz war-lerc'h ne dalv ket.

Pebezh sotoni... Ar marv da skouer, me a zo sur e teu deoc'h e-giz ar c'houked pe ur bugel, d'an diaesañ. Ne vije ket diaes lazhañ unan bennak pa ouzer petra eo ar marv e gwirionez.

LIZ.- Met, Chann...

CHANN.- Setu, n'eus ket tu da gaozeal. Gant gerioù e vezit kaset en tu all eus ho soñjoù. A, sellit, me 'zo 'vont da gousket bremañ avat. Ul levr a gemerin evel dec'h da noz. Lenn e-barzh va gwele, ha dijuniñ, ivez... A-wechoù, Liz, e savan d'ober va dijuniñ, hag ez an en-dro e-barzh va gwele da zebriñ. A, va Doue, setu plijadurioù ar plac'hed yaouank kozh...

LIZ.- Gellit ho piñe dimeziñ, Chann.

CHANN.- Un tammig muioc'h e vijen bet dimezet, va Doue. D'ar mare-se ne gerzhen mui war an douar ha ne sellen mui ouzh an horolaj. Ma, ma. Ken buan tra e vijen aet skuizh gantañ goude an eured, c'hwi 'oar penaos e

vezen pa oan yaouank. Nann, ne ouzoc'h ket : heñvel e oan ouzh va breur. Gwelloc'h eo chom hoc'h-unan-penn p'emaoc'h e-giz-se, n'eo ket gwir ?

LIZ.- Ho preur a oa un den mat, Chann.

CHANN.- Ya 'ta, un den mat. Ne ouien ket petra e oa un den drouk a-raok ma vije deuet en-dro eus ar C'hreisteiz hennezh. N'ho poa nemet sellout outañ.

LIZ.- E zaoulagad...

CHANN.- Dres.

LIZ.- Met ne raen forzh, Chann. Diseblant oan deuet.

CHANN.- Truez am boa.

LIZ.- Ar vuhez a oa e-giz-se.

CHANN.- O, n'eo ket. Me 'm eus klasket evañ neuze evel va mamm. Met ne oan ket avañsetoc'h. Ar c'hontrol eo. Ker sklaer e teue diabarzh va fenn ma welen pep tra du war wenn, kalz gwashoc'h eget boas. Avañsetoc'h, avat. Ha c'hwi 'vije bet kemend-all evidoc'h. N'hoc'h eus ket ur penn da c'hellout evañ. Ur penn leun a basianted hoc'h eus, penn unan en deus gortozet rummadoù bugale berrboell da respont goulennoù ar c'hatekiz, n'eo ket gwir ?

LIZ.- Marteze, avat. Me n'ouzon ket.

CHANN.- Leun a basianted da welet, kompren a rit, da welet. Ha dindan ez eus tan. Al levr tev-mañ a gemerin, mar plij deoc'h. N'it ket da gousket c'hwi ?

LIZ.- Nann, ket diouzhtu.

CHANN (o sellout ouzh al levr).- Daoust hag e vefe anv an den yaouank en deus leñvet da zeiz an interamant ?

LIZ.- Ya.

CHANN.- Perak en deus leñvet, Liz ? Met, penaos e c'hellfec'h gouzout ? Hag e c'heller leñvañ evit kement

a abegoù. Gwechall e leñven bemnoz e-barzh va gwele. Tremen a ra, sur, met da gentañ oc'h tuet da grediñ ho pezo un dra bennak dic'hortoz dre forzh leñvañ. Petra 'ra ar paotr-se ?

LIZ.- Mestr-skol eo.

CHANN.- Hañ ! Mestr-skol. Hañ ! Hag e leñve. N'oa nemetañ o leñvañ.

LIZ.- Ya.

CHANN.- Ur paotr mat eo ?

LIZ.- Ya.

CHANN.- Ma, gwella a se. Mont a ran da gousket erfin ivez. Nozvezh vat, Liz.

LIZ.- Kouskit mat, Chann. Ma'z eus un dra bennak hag a vank deoc'h...

CHANN.- O, ya, diskenn a rin.

II

(Liz a chom hec'h-unan-penn, difiñv, kollet en he soñjoù. Skeiñ a reer ouzh an nor ha kerkent goude e teu ar mestr-skol e-barzh. Yaouank eo, bras ha kaeroc'h eget ne vez ar vistri-skol war ar maez, bev-tre da welet. E anv a zo Anton.)

ANTON.- Evel just ez eus c'hwez ar c'hafe amañ. Petra a rafec'h hep kafe war un enezenn didud ?

LIZ.- Ya sur, azezit, petra 'rafen ? C'hwez ar va-kañsoù a zo warnoc'h, ha liv an hañv.

ANTON.- Ar porpant nevez eo. Hag ul lizher am eus bet. Ne chomñ ket pell fenozh. Deuet on da rentañ deoc'h ar re-mañ ha kemer reoù all mar plij. Hemañ, sellit, ne

dalv netra. Hemañ a zo gwelloc'h, nemet kalz re speredek. N'eus ket unan anezho a zo bet skrivet abalamour ne c'helle ket chom hep bezañ skrivet.

LIZ.- N'eus nemet al levrioù a gont evidoc'h. Kemerit ur banne kafe c'hwi ivez. Lavaret hoc'h eus ho poa bet ul lizher.

ANTON.- Ya.

LIZ.- Keloù mat ?

ANTON.- Ya.

LIZ.- Gwell a se.

ANTON.- N'eo ket al levrioù hepken a gont evidon.

LIZ.- Nann.

ANTON.- Laouen e oan, sur, p'em eus anavezet ho kwaz da gentañ da zont amañ da gerc'hat levrioù ha da gaozeal, ken alies ha bemnoz, a-wechoù. Heñvel e oamp evit traoù 'zo, ne gav ket deoc'h ?

LIZ.- Ya, sur.

ANTON.- Lavaret e vije n'oc'h ket sur. Evel just ne oan ket un den eveltañ. N'em eus ket bevet, me. Gortozet em eus, en ur sellout ouzhañ an deiziadur. C'hwi 'oar, c'hwi a zo bet oc'h ober skol ivez. Ne reer nemet kontañ an devezhioù, hag o renkañ hag o direnkañ evit gouzout peur e vo graet ar genstrivadeg jediñ hag ar genstrivadeg istor. Pa selaouen outañ e soñjen : "Ma labourfen da dec'hout kuit, ma studifen bemnoz..." Netra nemet ar soñjoù-se dija a oa un tec'h. Hag ennoc'h e soñjen ivez, ya, gwir, penaos e seblante ar vuhez bezañ aes evidoc'h, evel m'ho pije bet ur c'hevren bennak d'ho sioulaat, d'ho laouenaat, ya, gwir... sèt eo ?

LIZ.- Ur c'hevren a oa. Ha yaouank ez oc'h.

ANTON.- Ne vin ket atav. Hag en ur soñjal ennoc'h e-giz-se... Ya, sot eo da lavaret marteze, soñjal a raen : "Poent eo din dimeziñ, rak memes tra..."

LIZ.- Ya ?

ANTON.- Netra.

LIZ.- Peur emac'h o vont kuit ?

ANTON.- A-benn eizh deiz moarvat, n'ouzon ket c'hoazh, gortoz a ran unan bennak, dres.

LIZ.- Da zont amañ ?

ANTON.- Ya.

LIZ.- Amzer 'zo neuze, evel e lavare va c'hoar-gaer bremaik. Un dra am eus da lavaret deoc'h, diaes. Marteze e skrivin kentoc'h. Diaes eo, abalamour n'anavezit ket ac'hanon mat.

ANTON.- Eo, avat. N'on ket fall da varn an dud. Ho kwaz, da skouer, diouzhtu em eus gwelet pebezh teñzor am boa kavet, ha penaos e kare ar vuhez dre natur ha n'eo ket evel tud ar vro-mañ, en ur c'hortoz un dra bennak da c'hoarvezout. Piv a zo o tiskenn ?

(Unan a zo klevet o tiskenn gant diri-diabarzh an ti.)

LIZ.- Va c'hoar-gaer eo. Ha setu unan n'anavezit tamm.

CHANN (a zeu e-barzh).- Ho tirenkañ a ran ho-taou ? Liz, ur werennad dour, mar plij, da lakaat va dent da drempañ evit an noz. C'hwi a zo an hini en deus leñvet da zeiz an interamant, 'keta ? Azezit 'ta, arabat cham en ho sav dirazon. N'on nemet ur plac'h yaouank kozh. Ne vern peseurt gwerenn a raio, Liz, arabat deoc'h klask pelloc'h. Pebezh amzer vrein evit ar miz, 'keta ? Liz, ne c'hellin mui kousket. Ma n'ho tirenkan ket, ur banne kafe am bo c'hoazh ? Azezit 'ta, den yaouank.

ANTON.- Poent bras eo din mont kuit.

LIZ.- Amzer hoc'h eus.

CHANN.- Amzer en deus, sur, azezit, azezit, me a chomo amañ. Perak oc'h aet da leñvañ e-pad an interamant ? An dra-se eo en deus lakaet ac'hanon da brederiañ...

LIZ.- Marteze ne ouzoc'h ket, Chann, e oa Anton mignon bras d'ho preur. Dont a rae amañ bemnoz, koulz lavaret.

CHANN.- Dres, mignon d'am breur. Ha neuze ne gomprenit ket nag an eil nag egile ? Ne ran forzh ebet ma'z oc'h en em glevet ho-taou. Gwazh a se evitañ.

ANTON.- En em glevet d'ober petra ?

CHANN.- Va Doue benniget, daoulagad am eus. Gwazh a se evitañ. Eñ hag a grede abaoe pell ne vije ket marvet er gêr abalamour d'ur sorserez bennak a vro estren he doa prometet dezhañ e vije bet lazhet. Ha div wech a-raok kuitaat ar mor e oa bet hanter lazhet, ur wech e Chang-Hai hag ur wech en Haor-Nevez. Ha neuze e oa deuet da gredañ ne c'hellfe ket an Ankou tapout krog ennañ.

LIZ.- Selaouit, Chann...

CHANN.- Selaou petra ? N'emaoc'h ket o vont da lavaret din penaos e c'heller lazhañ un den a zo klañv e galon, gouzout a ran... Penaos eo marvet va mamm a gav deoc'h ? Ho kwaz a ouie. Ha pa lavaran deoc'h e komprenan ac'hanoc'h ho-taou... Hemañ a zo ur paotr mat, Liz; unan a c'hell leñvañ ; va Doue, n'eo ket ho kwaz ho pije gallet lakaat da leñvañ... Ha ma kav deoc'h ez in da lakaat brud fall war an ti-mañ... A-walc'h am eus bet gant va mamm pa'z ae da zañsal war blasenn an ti-kêr, meyv-dall. N'eo ket bremañ pa'z on deuet sioul war an oad, ez in da lavaret dezho eo bet lazhet va breur gant e wreg, dre garantez ouzh ur mestr-skol hag a zo mat ha kaer, feiz...

ANTON.- Foll ez oc'h pe n'oc'h ket ? N'hoc'h eus ket a vezh ? (O treiñ war-du Liz). Penaos e c'hellit chom e-giz-se ? Lazhet dre garantez, c'hwi 'zo foll pe petra ?

CHANN.- Siouloc'h, siouloc'h, den yaouank. A-benn bloaz, e c'hellot dimeziñ ganti.

ANTON.- Met gant piv ?

CHANN.- Gant an intañvez.

LIZ.- Klevit, Anton, gwell e vije deoc'h mont kuit. Rak bremañ c'hoazh ne da ket re fall an traoù ganti, met bremaik ne vo ket brav na da welet na da glevet. Alies eo bet e-giz-se. Alies he deus ijinet traoù spon-tusoc'h c'hoazh. Arabat ankounac'haat oc'h bet c'hwec'h miz e ti ar re foll e Montroulez, Chann. Kement-se...

CHANN.- Brav-tre, Liz, brav e gwirionez. En em zifenn a rit. Kement-se a zo brav, kement-se a vije brav, ma ne vije...

LIZ.- Kasoni ouzhin hoc'h eus bet atav.

CHANN.- Arabat deoc'h klask kompren ac'hanon, paour kaezh Liz, ne c'hellfec'h ket. Marteze e karan ac'hanoc'h, piv 'oar, hag e komprenan ac'hanoc'h. Me n'am bije ket bevet eizh deiz gantañ.

ANTON.- Mont a ran kuit.

CHANN.- Amzer hoc'h eus. Petra hoc'h eus da lavaret ? Aon hoc'h eus bremañ ?

ANTON.- Razoc'h ?

CHANN.- O, ket. Aon da vezañ tapet a-gevret ganti p'ho pezo gouezet ar pezh am eus da ziskouez...

LIZ.- N'hoc'h eus netra.

ANTON.- N'em eus ket aon, hag un dra c'hoazh a lavarin a-raok mont kuit. Me 'zo 'vont da zimeziñ ar miz a zeu. Lavaret he deus ya, hag em eus bet al lizher hiziv. Sklaer eo ? Komprenet hoc'h eus ? Ma karfec'h dont d'ar skol, Liz, ha n'eo ket chom gant ur follez. Lec'h a zo e ti ar rener hag e vije lavaret ez oc'h klafiv pe un dra bennak e-giz-se. Ar plac'hed yaouank kozh, ya...

LIZ.- Kit kuit, Anton, mar plij. Chom a rin.

ANTON.- Me a c'hellfe chom ivez ; marteze ganeoc'h.

LIZ.- Nann, avat, kit bremañ.

(Anton a ya kuit goustadik en ur saludiñ reut-trê Chann. Un dornad-fiziañs da Liz. Chom a ra an div vaouez o-unan. Ne lavaront tra e-pad ur pennad hir a-walc'h.)

CHANN.- Neuze ne ouie ket ?

LIZ.- Nann.

CHANN.- Ha n'ho poa morse diskouezet dezhañ ... ho karantez ?

LIZ.- Nann.

CHANN.- Ha bremañ ez a da zimeziñ gant unan all.

LIZ.- Ya. Ar vuhez a zo e-giz-se.

CHANN.- O ! n'eo ket... Ha bremañ ne welin nemet egile, gant e zaoulagad, egile marv er gêr, da virviken...

(Kouezhañ a ra war he daoulin, ha lefivañ sioul.)

Sofi BERNARD

DIGENVEZ

Ar gambr a oa leun a voged. Astennet e oa ar paotr yaouank war e wela, ur sigaretenn o vevezif etre e vizied melen. Marteze en doa ankounac'haet e oa ur sigaretenn war enaou gantañ kement en doa butunet abaoe an amzer ma oa aze, dififiv, e sell paret war al lein. N'eus forzh penaos, memes ar sigaretenn ne roe plijadur ebet dezhañ ken. A-wechoù e c'hoarveze dezhañ soñjal en e amzer grennoad pa'z ae da guzhat e liorz e dud kozh en ul lec'h anavezet gantañ nemetken. Kluchañ a rae e-unan aze, dindan ar skourroù. Nec'het e veze un tamm o tennañ ar sigaretenn hag ar voest vihan alumetez diouzh e c'hodell. Koulskoude en deveze plijadur o soñjal e tremene dreist lezenn ar re vras hep bezañ tapet. Ar bed holl a oa dezhañ. E benn a droe un tamm. Ne anaveze ket ar vezverezh-se ken. Mezverezh ar c'hentañ sigaretannoù e oa, met hini e vugaleaj ivez. An noz a oa o tont. Damguzhet e oa an traoù. Goulou ul lamp bihan a drese ur c'helc'h disi war al lein. Abaoe un nebeut munutennoù en doa echu an troer-pladennoù gant e dourni. Marteze e krede d'ar paotr en dije ar muzik mouget e soñjoù. Bremañ e kouezhe pounner an didrouz warnañ. Kloc'hig an nor e lakaas da zont en-dro d'ar gwirvoud. Piv a c'hellfe dont d'e welout ? E vignonez sur a-walc'h.

Ne oare ket pet eur e oa met moarvat he doa echu gant he devezh labour. Ne'z afe ket da zigeriñ.

Ne oare ket mat hag-efñ e felle dezhañ he gwelout pe get. N'eus forzh penaos, petra a c'hellfe kontañ dezhi ? Re faezh e oa evit distagañ gerioù. Re e-unan en em sante. Hag hi a c'houlennfe outañ peseurt kudenn a oa. Ne c'hellfe ket displegañ dezhi. Ne oare ket memes e-unan. Kollet e oa evel pa n'en dije bet plas ebet ken en hollved.

Ar c'hloc'hig a sonas meur a wech. Diziwezh e oa an amzer etre an taolioù sonerez. Pa teue da vezañ dic'houzañvus e paouezas da seniñ. Ne c'helle ket chom aze ken. Ret e oa dezhañ mont er-maez, gwelout ar straed, an dud, kêr. Da welout e oa war-dro eizh eur noz. Serret e oa ar stalioù. Ne dremene tost tremeniad ebet e-biou dezhañ. Dija e oa war enaou ar c'hleuzeurioù. Ne oare ket da belec'h e oa o vont. Antren a reas e-barzh un ostaleri. Leun chouk e oa. Ouzh an holl daolioù e oa tud. Azezañ a reas ouzh ar zink war ur skaoñ uhel. Ur plac'h yaouank, c'hoarzhus ha bourrus he dremm, a c'houlennas outañ petra a felle dezhañ evañ. Un hanter-hini en defe. Treiñ a reas davet an ostizien. Bez' e welas ur rummad tud ouzh un daol o kaozeal taer. Petra a c'hellent lavarout an eil re d'ar re all ? Diouzh o doareoù hag o jestroù e klaske divinout danvez o c'haezeadenn. Tremenet en doa efñ ivez eurvezhioù hag eurvezhioù da noz o kaozeal gant e vignoned. Leun a c'hoanag hag a uhelvennad e oa o gerioù. Dezoioù boemus a savent. Ne oarent ket perak e choment er Skol-Veur peogwir e vefe didalvoud o studioù er vuhez a faltazient. Met bremañ e oa e-unan. N'en doa hufvre ebet ken. Ne chome nemet an amzer a-vremañ gant he gwirvoud. Dre beseurt mod e oa bet distrujet e hunvreoù ? Ne oare ket. Tamm dre damm, un tamm muioc'h bemdez, e oa

deuet da vezañ faezh hag ankeniet. N'en em anaveze ket ken. N'en doa ket c'hoant ken da welout e vignoned. Skañvoc'h e veze e zigenvezder pa veze e-unan penn. An darempredoù e lakae d'en em santout pelloc'h diouzh an dud, diouzh ar pezh a gontent hag a vevent. Meur a hanter-hini a evas. Sellout a rae ouzh an dud o tont hag o vont hep gwelout anezho. Mestr an ostaleri a lavaras dezhañ e oa ret mont kuit. Edo o vont da serrif e stal. Goustadik ez eas ar paotr er-maez. N'en doa ket c'hoant da zistreiñ d'e rannidi. Da di e vignonez ez afe. Ret e oa dezhañ lavarout dezhi diouzhtu e oa echu an traoù etrezo. Memes an darempred-se a oa deuet da vezañ ur pouez evitañ. Petra a chome dezhañ ?

Pantcho MIHAILOV

AR JENOFLENN RUZ

E liorzh an ostaleri e oamp, dirak bep a werennad bier, me hag ar mezeg yaouank K. nevez-distro eus Bro-Alamagn.

Kalz e komze va c'heneil ; difretañ a rae war e gador, saludiñ trouzus e vignoned pa dremenent, leuskel fentigelloù hag, alies-tre, sevel e werenn gant ur "yec'hed" trumm ha dievezh.

" Yec'hed deoc'h ! " Ha kreñv e skois ouzh e werenn, a reas un trouz un tammig goloet, evel aonik.

Ur plac'h yaouank, ganti bleunioù da werzhañ en ur baner vihan greñn, a ginnigas deomp jenoñ ; re ruz ha re wenn a oa ; hep dibab e tapis unan ruz hag e rois anezhi d'ar mezeg.

" Trugarez ! " Hag hir e c'hwesas he frond, ouzh he zreiñ hag ouzh he distreiñ etre bizied e zorn dehou.

Hep dezhañ merzout, e tizelias ar jenoñ, he bleufvzelioù ruz o kouezhañ war an traezh. Soñjus e savas e benn.

" Arsa, petra 'zo ? "

Ne respontas ket diouzhtu ; un huanadenn a zeuas gantañ, gwennoc'h un disterig ez eas e zivjod hag ur skeud teñval a dremenas en e zaoulagad kaer liv an alamandez.

" Petra 'zo ? "

Hag ar mezeg, goude evañ ur banne bier ha harpañ e zivskoaz ouzh kein e gador, da gontañ din, goustad, gant un dristidigezh sioul, ar pezh a zo amañ da heul :

" C'hwil 'oar am eus graet va studioù e Gr.

Atav, war va hent d'ar skol-veur, e'n em gaven gant an hevelep plac'h : ur plac'hig - hogos ur bugel - munut ha disliv, hogen dezhi daoulagad leizh ha melkonius e-giz d'ur vaouez uvel ha feal.

Hag ar jenoñ dizeliet-se, gant he frond soutil ha tristidik, a reas din soñjal enni - en he dargreiz, en he melen fonnus a rodelle a-zindan an togig, en he divronn bihan a grene gant pep kammed, en he sellad difiñv, c'hoantek, youlek...

Gouzout a ouien e oa a-ratozh e tremene dre ar straed a zarempreden, hag e heulie ac'hanon pennek dre he selloù.

Ur wech, zoken, ne gollas ket he zro d'ober anaoudegezh ganin. P'edon o sellout ouzh listri kaer, aour hag arc'hant, e stal ur bravigour, setu hi dont da gomz din :

" N'oc'h ket eus amañ ? "

" N'on ket. Eus Bulgaria e teuan."

" Neuze oc'h mignon deomp." Hag eeun-tre, e-giz ur bugel, ec'h astennas he dornig.

Her stardañ a ris.

Ha ni da ziskenn gant ar boulouard, o tivizout diwar-benn an dud war ar straed, ar c'hirri-tan, ar c'hiz nevesañ d'en em wiskañ hag ar pezhioù a veze displeget e c'hoariva Reinhardt...

Goude-se e teuas bemdez da c'hortoz ac'hanon e-tal kael ar skol-veur, ganti ur bokedig jenofl a ginnige din, lentik a-walc'h, pa starde va dorn en ur grenañ.

O c'hemer a raen - hep plijadur, rak n'en em santen ket douget dezhi tamm ebet ; he zrugarekaat a raen gant un tammig mousc'hoarzh yen hag, o lavarout dezhi em boa kalz labour, en abeg d'un arnodenn pe d'ur vodadenn bennak, e kuitaen anezhi buan.

Goude-se ez aen tramek penn all kêr ha, diwar naon, kollet ganin ma anal, e sonen ar c'hloc'hig ouzh un nor houarn du, hag e c'hortozen e-pad eur-vezhioù hir ma c'hoarvezfe da unan bennak digerifi evidon.

Eno e vezen degemeret atav en un doare yen, dichek, goapaus... Ha c'hoazh ! Gwashoc'h a oa ! Kement se a verzen, a santen, hag a c'houzañven rak eno e veve ar plac'h a garen.

Reiñ a raen dezhi ar jenofl a oa bet profet din gant ar plac'hig disliv hag a-wechoù, p'am beveze arc'hant, pezh na c'hoarveze ket alies, e prenen bleunioù all, bleunioù hag a blije dezhi, hogen en un doare dichek e tegemere anezho bep taol.

" Bleunioù adarre, ha perak 'ta ? " a c'houlenne gant ur vouezh skuizh hag enoet, en ur stlepel anezho forzh pelec'h.

Ha pa'z aen kuit e kounnaren ouzhin va-unan, e tanten va diweuz, hag alies e touen chom hep mont adarre e-barzh an ti milliget-se.

Trawalc'h, a sôñjen, trawalc'h gant ar vezh, an anken hag an dispriz.

Hag an deiz war-lerc'h e vezen adarre e-tal an nor du dizegemerus, er gambr vras ha sklaer, dirak

an daoulagad kaer ... kaer met yen ouzhin.

Un noz e oan o tistreiñ diwezhat, trist ha hurennek evel kustum.

Goustad e valeen a-hed ar straed didrouz ha poul-trennek, o stlejañ va zreid hag o prederiañ. Birvif a ras va fenn.

" Perak, perak 'ta e karomp ar re na garont ket ac'hanomp... perak 'ta ar boan-se, e-giz ur villigadenn, en ene mab-den ? Hag-efi n'eo ket ur stumm eus ar youl-se, diwalc'hus ha peurbadus a vez ennomp... ar c'hask eus Doue ? "

Evit doare e oa ken dalc'het va spered m'am boa distaget va soñjoù a vouezh uhel.

Hag unan bennak a-dreñv din a c'harmas "ya", o kregiñ gant mignoniezh em dorn.

Treiñ a ris...

Va flac'hig an hini 'oa. Ganti e oa pemp jenoflenn ruz skoulmet brav gant ur seizenn c'hlas.

Pell-pell e selljomp an eil ouzh egile hep rannañ ur ger, hag en diwezh e teuas dimp kompren e c'houzañ- vemp gant an hevelep glac'har.

" Tremenomp an nozvezh a-gevret ", emezi aspedus.

" Hogen... un arnodenn 'm eus arc'hoazh. "

" Gouzout a ran. "

" Neuze ? "

" Netra. Betek div eur, ha goude..." a hiboudas tener hag, hep echuiñ he c'homz, e stardas va dorn.

Tomm e oa he dornig bihan feal.

Asantiñ a ris.

" Mat... hogen ket en ho kambr ! "

Gant keuz ha tristidigezh e klevas an dra-se.

" Mat... ket em c'hambr..."

Mont a rejomp d'ur c'hafedi bihan, gwan ar goulou ennañ. Den ebet e-barzh. Goulenn a ris bier ha traoù da zebriñ. Ne gomzen ket kalz.

Hi, avat, a bare warnon daoulagad levezzeun hag a starde va dorn dindan an daol ; a-wechoù e floure va bizied, a-wechoù palv va dorn, hag a hañvale ken bras e-skoaz he bizied munut.

En diwezh, aet skuizh, e tiskrogas diouzh va dorn, ken aes ha ma tiskrog ur bugel diouzh ur c'hoariell, war he muzell ur mousc'hoarzh bihan dister, ar seurt mousc'hoarzh a gemenn n'emañ ket pell an daeroù.

" Neuze e lavaromp kenavo ? "

" Ya. "

" Da viken ? "

" E-giz ma plij deoc'h. "

" Nann... e-giz ma plij deoc'h-c'hwi. "

" Ne vern din. "

" Gouzout a ran. "

" Neuze..."

Tefivalaat a reas he dremm.

" Kenavo da viken ! " Stouñ a reas, pokat d'am dorn, ha dilammat kuit.

Ne welis ket mui anezhi adarre. Ha petra 'oa, kig pe spered, ne ouzon tamm. Hag he c'harantez, ar vezh a c'houzañvas a-youl-gaer ?... Diwezhatoc'h e komprenis... re ziwezhat !

He jenofl dezhi hag int fresk c'hoazh ha ruz-tan, a brofis da honnezh a garen, da honnezh na daole ket muioc'h a evezh ouzhin eget ouzh unan eus nozelennoù he botoù.

Daou zevezh goude e kavis ar bleunioù e kambr ur c'hamarad, mesk-ha-mesk gant e levrioù, paperennoù ha kaieroù.

Dispourbellañ a ris va daoulagad.

" A belec'h e teu..."

" Petra, ar jenofl ? "

" Ya. "

" O, selaou. N'eo ket ganin int bet prenet. Bez' ez eus unan a vez atav o tont amañ..."

" Atav ? "

" Ya... a-benn ar fin on aet skuizh. Hag-efi n'hall ket pe n'oul ket, kompren ? Aet on darn gant honnezh... arc'hoazh e sparlin an nor outi. Be' rin avat ! " Hag efi da c'hourvez war e wele, krizet e dal, e zaouarn sanket don en e c'hodelloù.

" O, me gar ur plac'hig... daeroù ha sonerezh, setu petra eo-hi. Skrivet em eus dezhi, aspedet anezhi, hogen ne respont ket... Honnezh eleveziek, gwenn-disliv he dremm, ha munut, gant un ene glan ha ... daoulagad leizh. He gwelet em eus e-tal kael ar skol-veur... alies ... er sizhunioù all... Ha bremañ... gortoz, ar bleunioù-mañ a gasin dezhi... 'Gav ket dit e vafe un dra vet da ober ? "

Tevel a reas ar mezeg hag adarre e krogas ar sone-rien da seniñ.

(Brezhoneg gant Per DENEZ hervez un droidigezh esperantek, diwar ar bulgareg, gant Iv. H. KRESTANOV)

Embannet evit ar wech kentañ en Aval en Irc'h, hag adwellet evit Skrid.

Ifig SKIRIOU

VIVIANA, AOUR PE OR,
PELEC'H 'MAOC'H-HU ?
LENNEGOUR PETRA RIT-HU ?

Un heol gwenn a bare etre targosioù diskourret ar c'hleuz. Ur voualc'h a biklamme dirazomp penn da benn gwrinnenn ar waremm. An amzer a oa skornet ha difiñv war an uhel.

" Pell emañ c'hoazh ? "

En ur zerc'hel da vont gant an hent karr e te-gouezimp ba'r gêr. Tier bihan gant o mogerioù pri melen oa a-bep-tu.

Hir amzer a gerzhjomp c'hoazh. " Ken pell-se ? "

Tamm mat pelloc'h oa ledanoc'h an hent. Ha ter e c'holoe. Ter du. Kirri ha tier uhel-oc'h-uhel a-bep-tu.

" Bemdez en ur vont da lakaat paperachoù ba'boestoù an H. L. Moù e kerzhont heñvel met ral a wech e kanont "

Edomp degouezet e penn pellañ al letonenn. Ul lamm a rejomp dreist d'ar c'harzhig gant nerzh hon arzelloù yaouank. Etre daou savadur e tarzhas ur savadur uheloc'h c'hoazh, gant livioù ha stummoù mein a-bep-seurt da bep estaj, ur seurt tog bihan war e c'horre.

" Du-hont " a lavaras din en ur astenn e zorn.

Ken uhel ha noazh oa ar savadur, na gredfen morse mont da zineizhañ neizh-pig an tog bihan.

" Me'blijfe din gwelet ne'añ kanañ " Tostaat a rejomp. Skrivet oa, evel kustum, e nec'h an ti uhel-se : " PENN KREC'H ", hag en traon : " PENN TRAON " hogen ivez war un nor : " ANTRE " ha war un nor all : " SPORTI "

" Kement a draoù a vije da c'hoùd 'vit gellet laret en a-raok pegoulz e kano, ha n'eo ket posubl..."

" Ha padal, un dra 'zo sur, kanañ 'ray ! ... "

En ur heuliañ biroù gwenn ar panojoù glas, en em gavomp ba'n ti.

Ti bras al levrioù eo hemañ.

Ti al lennegezh.

Salioù a-bep-seurt a zo. Salioù bras ha brav, gant moket war al leur ha lampoù chik a-stribilh deus al lein, a zo evit al lennegezh uhel. Ur sal brav a-walc'h 'zo ivez evit al lennegezh etre hag ur sal vras all evit al lennegezh izel, an islennegezh, hag eveljust, boutinoc'h eo ar moket enni. Ur sal istorel zo evit al levrioù istor hag ur sal e-kichen, jeografit tout, a zo hini ar jeografiezh.

Ur sal zo ivez evit al levrioù brezhonek. Ur pres bras evit Al Liamm hag unan kozh evit al levrioù katekiz.

E pep lec'h vez gwelet tud ha skritelloù pe paperachoù bruderezh. Tud gant dilhad sul ha kravatennoù. Tud blev hir ha brageier dislivet. Gante holl daouarn c'hwec ar re a oar ar stek deus al levrioù.

Paperachoù bruderezh a-bep-seurt zo war daolioù kont diskouez " TARIF SPECIAL ABONNEMENT A L'EXPRESS " " LENNIT AL LIAMM, KELAOUENN LENNEGEL VREZHONEK; RENER RONAN HUON " " PARIS MATCH SPECIAL GENOCIDE FOETUS " YOD KERC'H AR FOER WAR LERC'H, YOD DU AR FOER DIOUZHTU " " CHARLIE HEBDO, KAOC'H PE GI, C'HWI

A C'HOARZHO. "

Hag an dud a rambree, landrean ha digoustiañs.
Paotr ar paperachoù a yae atao, a di da di, a
voest da voest, ar memes kerzhed gantan, atav heñvel
ouzh kerzhed paotr ar sizhun a-raok.

Ha tud o c'hortoz, levr ebet gante, o c'hortoz o
zro, gante en o fennoù daoulagad ar re a vez o
c'hortoz.

Ha padout a ray pell ?

Moredet e vezer gant ar c'hloar m'eo an aer eno
dindan al lampeù bras a-bep-stumm zo o sklerijennañ
an trepasioù.

Lennegezh vrezhonek ; lennegezhioù bihan, lenne-
gezhioù digontamm ha yac'h. Digenwerzhel. Lennegezh
an dieubidigezh. BREZHONEG ARM AN DISPAC'H. Al liamm,
Barr Heol, binvijiri an dispac'h, hent an dieubidi-
gezh.

Ha Pobl Vreizh (- digarezit -)

" Diblouzañ a rez ? sell 'ta ar c'hannad kenwerzh
o tont davedomp. Petra emañ o vont da gontañ deomp ? "
Dedostaat a rae. War e dog oa skrivet I.T.T.
War e vrec'h C'EST SHELL QUE J'AIME.

Hag anaout a rit Neruda ? Ur barzh kaer eo, barzh
an dispac'h 'keta. Hag e vro ken kaer, ken siaoul,
ken brav bevañ enni - Organizez vos vacances au
Chili avec Havas agences - Kanet en deus e vro Neruda,
liv e vro, liv limestra, liv ar gwad.

Ya ur barzh ruz eo-eñ. Kanañ 'ray deoc'h braven-
tez ha kaerder ar sokialouriezh e bro ar sokialou-
riezh. Kontañ a ray deoc'h lealded divrall ar jene-
ral Pinochet, ezel gouarnamant sakr an unvaniezh
pobl, hag e zislealded...

- N'eus ket nemet ar c'henaouerien na cheñchont
morse ide.

- Ar gwir zo d'en em dromplañ, 'keta ?

Hag anaout a rit Jara ?

Un toull en doa graet er voger evit gallet mont
ba'r stal. Siwazh evitañ ne gavas nemeur enni. Ur

montr en doa kavet.

Barnet eo bet d'ar marv .Kamerun 75.

" Ur wallenn eo an dilabour. Ur wastadeg nerzhioù
n'eus ket tu asantiñ de'i. Un den dilabour zo un
den mac'hagnet.

Kresk an dilabour ne c'hell nemet fregañ al lien
sokial en hor bro ha lakaat da ziwanañ oaledoù feulster
nevez.

Ne zle den soñjal eo didec'hus an enkadenn, ha
chom dinerzh pe tremen gant treuz-pareoù.

Dleout a ra an holl ober ar striv rekis diouzh
pegen grevus ha start eo an enkadenn " !...

Komz politikerezh zoken a vez graet en ti-mañ!
Ha plijout a ra deoc'h al lennegezh vrezhonek ?
Grit ur c'hammed war-zug an denelezh gwirion,
war-zug an dispac'h gwirion, gant al lennegezh
vrezhonek.

Bez' zo bet al lennegezh beleg ha bez 'zo c'hoazh
diouti. Hag al lennegezh zink. Ha lennegezh al lann
alaouret hag ar brug roz. Ha lennegezh ar c'hizhier
bihan ha barzhoniezh ehanoù skol an hañv alaouret.
Lennegezh ar pirc'hirianañoù hag Omar hag Onasiz.
Hag aet omp bremañ gant al lennegezh skol, al lenne-
gezh skol-veur zoken.

En tu hont d'ur milion a dud dilabour zo er vro,
15 % a gresk war ar prizioù pe ouzhpenn ha 5 % a
gresk war ar goproù nemetken.

Hag int bet trec'h, e talc'hont da gas labou-
rierien a viliadoù d'an dilabour, e talc'hont da la-
kaat kresk war ar vuhez, e talc'hont da ziskar hor
gwirioù.

15 % eus budjed ar stad 'ya d'an arme. (Gwir
eo n'eo ket kement hag e Bro Indez : 25 % ! Met
gwir eo ivez ez eus du-hont milionoù a dud marnaoniet.
Chatal kounnaret da ziwall.)

Da c'hellout kas en-dro o ardivink ekonomikel
eo ret dê diorren mui-oc'h-mui ar produadur armoù.

Ekonomiezh armoù a gas d'ar brezel. Div wech
dija. En 1940, e yae etre 0,5 % ha 1 % eus budjed
Amerika d'ober armoù. Hiziv ouzhpenn 20 % ...
Va digarezit Aotrou ker

Pennoù-hoc'h o full-over ruz !
Gante, dazont ebet evit an denelezh, dazont
ebet evit ar yaouankiz.
Deomp de'i !
Va digarezit Aotrou, disoñjet hoc'h eus ho tis-
glavier

Hogen Broadelezh Vreizh !
Silvidigezh Vreizh !
Dazont Breizh !
Pobl Vreizh !

Leuskit ar studieren yaouank da zont davedon.
Erru eo ar pardeiz ha skuizh on ; met me 'gar ar
c'halonoù yaouank hag entanet

C'hwi 'gar Breizh hag he yezh. Emañ dazont hor
bro hag ar sokialouriezh etre daouarn ar yaouankizoù,
c'hwi 'zlefe skrivañ. Al lennegezh an hini zo goell
ar bed hag an dispac'h.

A ! Sevel ur skrid bennak ! Ur skrid a lennegezh.
Lennegezh ! Ur skrid politikerezh lennegel mar kirit,
met pas re daer !

Ur skrid a lennegezh a c'hiz vodern da skouer.

Rak ne dalvez ket da unan sevel ur skrid sioul ha
kempenn. Adlivañ war baper ar gevier pemdeziek ?
Hogen gant pompad an arz pe gant lirzhiniezh ar-re-
zo-finoc'h-eget-fin ! Adstummañ neuze touelloù ha
respektabilite ar gevredigezh ? Leuniet eo bet
bezioù ha beredoù gant se holl, ha karget presioù
gant seurt lennegezh. Ma ! ...

Pe kontadennoù ma vo taolennet enne ar bed e
brezhoneg ? Ar bed galleg gant e holl sotonioù, e
hudurniezh livet holl e brezhoneg ! Nag ur bennobe-
renn ! Nag un arz ! Nag ul lennegezh ! Kultur
ha sevenadurezh. Nevez. Gwirion.

Al Liamm ; Barr Heol ; Evit ar Brezhoneg ; Pobl
Vreizh ; An Houad eus an Naoned da Vrest : Hent an
dieubidigezh. (Hiziv bezañ dieub zo bezañ kelaouet)

Paperachoù impoioù galleg nag un euzh, ur wask !
BREZHONEG, ARM AN DISPAC'H ! Paperachoù impoioù
brezhoneg, nag un drugar !

Enrollit en arme e brezhoneg ! Ober ur brezel-
dieubiñ e brezhoneg !

BREZHONEG ARM AN DISPAC'H ! Toullbac'hit, bourevit,
lazhit, lazhit ar re baour evit mad ar re binvidik,
keit ha m'eo e brezhoneg eo evit mad ar vro. +
Kement-se holl en ur gontadenn, nag un danvez
enorus !

Hag ar vraventez ?

Tizhout ar vraventez. A an orgasm ! Ar vraven-
tez war he noazh. Ar Vraventez peurbadus ha divare,
ar vraventez-se a advev heñvel a gantved da gantved,
he damwelet pa spurmant hag hec'h aroueziañ da viken !..

Braventez peurbad ha koulskoude ken berrbad !...
Ha daoust ha n'eo ket degouezet deoc'h, c'hwi 'oar,
gant ur vlevenn blac'h, ur vlevenn hir ha melen ;
ya klask ober 63 skoulm keit ha keit an eil deus
egile ?

Kaerat abadenn !

BREZHONEG, ARM AN DISPAC'H

Skrivañ 'giz mod kozh ne dalvez ket : n'eus ken
gwelet : ni, na Breizh n'omp bet dieubet gant dane-
velloù mod kozh Gwalarn. Poent cheñch penn d'ar vazh.
Cheñch mod ! Skrivomp modern !!!

Ur skrid a lennegezh, n'eo ket ur gontadenn,
n'eo ket un istor. Kontañ un istor n'eo ket lenne-
gezh ; Arabat e tiflpe buan hag aes brezhoneg brav
eus beg pluenn ar stilo.

Pas ober kemmadurioù 'vije dreist, ar gwellañ
arz brezhoneg a-viskoazh... Met marteze 'vo graet
se gant unan bennaket a-raok na vo echu ganin ar
bennoberenn a lennegezh-mañ. Dalvezfe ket mui...

Bremañ 'eo deut diouzh ar c'hiz chom hep ober
gant pikoù pe virgulenoù pe pennlizherenoù
(perak avat e cheñcher atav linenn ?) Kalz arze-
loc'h, kalz donoc'h e teu ho skrid hag ho soñj ker-
kent ha ma vezont dieubet eus tout ar c'habestroù-se.

Me 'skriv c'hoazh gant pikoù, virgulenoù pe
pennlizherenoù evit gallet adlenn pezh a skrivan.
Met ma kavit seurt komz plaen gwall zivlaz, re blaen,
lamit anezho kuit hag adskrivit pep tra a gwer-
zennoù dieub pe distag gant klotenoù pinvidik met

digabestr eveljust.

Ya ma ne gavit ket arzel a-walc'h na sasun a-walc'h an danevell-mañ, merit hag adskrivit anezhi. Aravat d'al lenner chom hep ober tra nemet konsomiñ !

+ Kement-se 'zo bet graet dija - ha meulet - met digarez marteze ez an un tammig amplik hor barzh yaouank. Sinet gant An ael-gward pe la censure e yezh Freud.

Dastum un nebeut elfennoù ha lakaat c'hoari kenetrezo. Gwelloc'h sterniañ anezho diouzhtu : ar mor, an oabl, ul lestr pep tra steuziet e barzh ar vorlusenn pe ar morglav. Splann eo deomp e vefe dav resisaat an daou c'her-se...

" Un orjalenn c'hlas, un orjalenn ruz, unan oranvez. Kroaz. Pistolenn ha soudiñ. "

Un orjalenn wenn, unan velen, hag unan melen ha du. Digoaz. Pistolenn ha soudiñ.

Laka 'r pezh 'istribilh deus ar c'hrog ha kemer 'n hini zo 'tont. "

C'hoari.

Ya c'hoari - ger lies-ster - dastum elfennoù ha lakaat c'hoari kenetrezo. Un elfenn c'hlas, un elfenn ruz hag unan oranvez ha frammañ anezho.

Hogen

Hag an dour-c'hwez, zo e vlaz evel blaz ar bara hag ar garantez ?

Hag ar gwad, ar gwad skuilhet

hini ar gwilioud pe an difloriñ

hini ar vicherourien vitrailherezet ?

C'hoari - ger lies-ster -

Un elfenn c'hlas, un elfenn ruz, unan wenn. Livioù an dispac'h. An dispac'h tremenet.

An hini c'hlas vo ur paotr pe ar menez pe ar porzh,

An hini ruz vo ar vro, ar mor, pe ar plac'h.

Hogen

Hag al labour, al labour krouer, al labour laeret ha foranet

Hag ar stourm, ar stourm aozet, ar stourm emskiantek ha dieuber ?

- Kerzhet 'rack, ba' kreiz al luskad, digor hon daoulagad ha start hon youl -

Ah ! peoc'h 'benn ar fin ! N'eus ket 'voaien da voaienniñ ken !

Lenner, selaou, ha ra intenti ha ra denni kentel eus mell eskern hor Salver Jezus Krist, bet adsavet eus a-douesk ar re varv da Superstar, eus a-douesk ar veleien chakal da zispac'helour :

erbedet out pa lenni al linnennoù-mañ da baouez pa gari gant da lennadenn, da leuskel da spred da redek pe da gabestrañ anezhañ diouz ar c'honjonktur meteorolojik (diouz ma vez brav pe fall an amzer...) ya, erbedet out da soñjal ha da adsoñjal war zigarez ar skrid-mañ - evel war forzh peseurt skrid all - da derrañ ar frazennoù anezhañ.

Fellout a ra deomp terrif hor frazennoù, terrif hor brezhoneg hag e yezhadur evel ma vez torret deomp hon yezh, hag hon bro ; fellout a ra deomp terrif hon danevelloù evel ma vez torret hon buhezioù deomp hag hon dazont.

Ar pemdeiz ne ya ket deomp rak skeudenniñ ar bed hag ar vuhez a fell deomp ober.

Hogen he skrivañ a fell deomp. Ha skrivañ a dalve d'un dra bennaket ?

Lennegezh zo komz.

En em gavet oan er-maez an ti bras ha klouar, war ur blasennig, war lez un hent bras.

O komz ma-unan a-vouezh uhel. Ha tud e-leizh o vont e-biou din hep ober van. E'i oa an noz ha 'oant ket-int erru c'hoazh deus o labour. Ha kirri o vont hag o tont, o gouleier gante war elum, a drouze etre div renkennad H. L. mou uhel ha noazh. Flaer ar moked-ezañs oa da vat o reiñ blaz da yenijenn an noz.

War elum oa c'hoazh lod eus ar staliou. Livioù ruz, glas hag oranvez a biklamme penn da benn a-hed ar straedoù, hag ar c'hirri diniver o vont hag o tont d'o heul. Al lampoù straed, g'o gouloù aliv d'al loar oa c'hortoz, a-hed ar riblenn, bugale na deufent ket da c'hoari...

" N'eus kemm ebet " ...

Distreiñ a rejomp dre an hevelep hent, goustad.
An delioù staget gant ar skorn ouzh al leton, hag ar
bodoù sec'hkouezhet e-pad an goañv, a zraske dindan
hon zreid. Ar c'hoad a oa difiñv.

Du-hont, eus tu ar gêr e teue ur fraoñvadeg
vouget, ur seurt sarac'h ankenius, evel ar gouleier
droulivet, moredet a-drek an torgennoù teñval.

Roazhon. Goañv 74-75
Aktualizet Here 78.

AL LIAMM

RONAN HUON
UR VOUEZH ER VORENN
Danevelloù
30 lur

YOUENN OLIER
E PENN AN HENT
Romant
39 lur

DIDROUZ
TRUEZ VA DOUE
Danevelloù
38 lur

HOR YEZH

HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET E 1954
GANT ARZEL EVEN. RENER: PER DENEZ
KOUMANANT : 50 LUR DA Y. DESBORDES
1, PLASENN CH. PEGUY, POUILLBRIANT
29260 LESNEVEN. CCP 1499 51 ROAZHON

EMBANNADURIOU HOR YEZH

GERIADUR YEZH DOUARNENEZ
1. AR PESKED HAG AL LABOUSED
40 lur

HIROC'H EO AN AMZER EGET
AR VUHEZ Danevelloù
gant PER DENEZ
36 lur

